

KANNAOIG Imbourc'h



Kelaouenn *Emglev An Tiegezhioù* niv. 89 Genver - C'hwevrer 2015 Priz : 3€

Evel un tsunami war Vro-C'hall

Da heul mesbukadoù Pariz eus derou miz Genver 2015 hor bize kredet e oa bet kemmet gerioù-ardamez ar Republik C'hall : “Liberté, Égalité, Fraternité” a oa deuet da vezañ “Je suis Charlie”.

Tizhet grevus eo bet Bro-C'hall e derou miz Genver 2015 gant tagadennoù djihadourion vuslimat, hag an hini spontusañ hag an hini euzhusañ a zo bet tagadenn stavelloù¹ ar gelaouenn flemmus “Charlie Hebdo” e Pariz, ma-z eo bet drouklazhet enni daouzek den (dek den eus ar gelaouenn ha daou gerreizhour² karget da wareziñ al ludresadennerion). Abeg an dagadenn-se, diarc'het³ gant an drouklazherion o-unan, a oa dialañ ar “profed” Mohamed, bet ludresadennet er

gelaouenn-se en un niverenn arbennik e 2006, pezh en doa graet reuz un tammig e pep lec'h er broioù musulmat. En hevelep devezh un djihadour all a zrouklazhe pevar den all en ur gourvarc'had kasher e Pariz atav, *Porte de Vincennes* ; aze e oa gant ar mestaol un azon

enep-yuzev peogwir e oa yuzev ar pevar den lazhet. E Montrouge, bepred e rannvro Pariz hag en hevelep deiz e voe lazhet ur gerreizhourez⁴ gant un den o tennañ gant ur fuzuilh Kalachnikov, a c'hloazas grevus ur gwazour all.

Seitek den drouklazhet en un devezh gant tud oc'h amc'houlenn⁵ an Islam ; fromet-mik e voe Bro-C'hall a-bezh gant ar mesbukadoù-se⁶, seul vui ma ouezas kerkent ar gouarnamant hag ar meziennoù reiñ un tregern bras d'an darvoudoù.

Fromet e voen evel-just evel ar re all gant an darvoud-se, gant niver an dud lazhet, hogen ne voen ket ken souezhet-se gant e ampled. E kerzh ar sizhuniou a-raok e oa c'hoarvezet darvoudoù hor gouzave e oa traoù all oc'h en em brientiñ : d'an 20 a viz Kerzu 2014, e Joué-les-Tours, e voe

taget tri c'herreizhour en o c'herreizhva⁷ gant un den yaouank genidik eus ar Burundi o gloazas gant ur gontell keit ha ma youc'he *Allah hu akbar*. Lazhet e voe gant ar gerreizhourion e degouezh a reizhdifenn ; d'an 21 a viz Kerzu



¹ Stavelloù : *locaux*.

² Kerreizhour : *policier*.

³ Diarc'hañ : *revendiquer*.

⁴ Kerreizhourez : *une policière*.

⁵ Amc'houlenn : *se réclamer de*.

⁶ Mesbukad : *attentat*.

⁷ Kerreizhva : *poste de police*.

2014 e Dijon, en deus sailhet un den gant e garr war dremenidi e meur a lec'h e kêr, disoc'h : unnek den gloazet ma oa grevus daou en o zouez ; d'an 23 a viz Kerzu e Naoned war ar Marc'had Nedeleg e voe taolet c'hoazh, ha dre veur a wech, ur c'harr war an dud bodet en-dro d'an tinelloù, gant un den a glaskas goude-se d'en em lazhañ a daolioù kontell. Disoc'h : nav den gloazet gant daou anezho grevus hag unan marv. Bewech e voe diskouezet atebeion⁸ ar mestaolioù-se, gant ar gerreizh hag ar meziennou, evel tud klañv direizhet, bleizi digenvez, hogen ne oa ket : lakaat a raent e talvoud urzhioù Abou Mohammed al-Adnani, degemener⁹ ar Stad Islamek, en deus taolet e c'halvadenn d'ar muntr d'an 22 a viz Gwengolo 2014 : *“Mar gellit lazhañ un difeizad amerikan pe un difeizad europat – peurgetket ar C'hallaoued lous ha fallakr – pe un Aostralian pe ur C'hanadian pe kement keodedad eus ar broioù a zo aet en ur c'hengevredadur a-enep ar Stad Islamek, neuze kontit war Allah ha lazhit anezho diouzh n'eus forzh pe zoare. Mar ne c'hellit kavout un ijinenn tarzhe pe ur bistolenn gant tennoù, neuze digenvezit an Amerikan difeiz, ar Gall difeiz pe n'eus forzh pehini eus e gevredidi. Skoit ouzh e benn gant ur maen, dic'houzougit anezhañ gant ur gontell, flastrit anezhañ gant ho karr, taolit anezhañ d'an traoñ diouzh ul lec'h uhel, strankit¹⁰ anezhañ pe pistriit anezhañ”*. Diaes eo chom hep degemer eo bet selaouet Mohammed al-Adnani gant an torfedourion-se hervez an doareoù arveret ganto evit seveniñ o mestaolioù.

Lavaret em eus uheloc'h ne oan ket bet souezhet kement-se gant ar mesbukadoù-se c'hoarvezet e Pariz, en abeg da stad a zamvrezel ar mare etre ar C'hornog hag ar bed muslimat, hogen souezhet e voen gant an doare ma ouezas ar Prezidant gall F. Hollande¹¹ korvoiñ an darvoud evit e c'hounid oc'h aozañ ur vanifestadeg vras e Pariz d'ar Sul 11 Genver, ma voe pedet da zont un toullad pennoù-gouarnamant eus Europa hag eus ar bed a-bezh. Gant mesbukadoù London a reas war-dro hanter-kant den marv ha gant re Madrid a reas muioc'h eget daou c'hant den marv, ne oa ket bet a vanifestadeg evel-se. Graet

⁸ Atebeg : *responsable*.

⁹ Degemener : *porte-parole*.

¹⁰ Strankañ : *étrangler*.

¹¹ Da notañ : morse n'eo bet distaget ar ger *“islamouriezh”* gant F. Hollande en e areizhioù, nemet ar ger *“sponterezh”*, atav *“droukvesk ebet”* evit chom hep gourtamall ar Vuslimiz c'hall.

e voe an dra-se gant kenwallerezh ar meziennou, a ouezjont da skouer, e keñver niver an dud o tiskelañ er gerzhadeg republikan-se e Pariz hag un tammig e pep lec'h er c'hêrioù bras all, chom hep ober rendael war niver an dud o kemer perzh evel ma-z eo bet graet evit ar Vanifestadeg evit an Holl e 2013 ha 2014. Ar wech-mañ e voe kentoc'h kresket an niver pa oa bet digresket kalz gant ar gerreizh, en urzh ar galloud sokialour, evit ar re a oa a-enep lezenn Taubira. Da notañ ivez : er vanifestadeg-se e oa dreist-holl Gallaoued a orin - gouverket eo bet an dra-se gant meur a gronikour, evel A. Finkelkraut da skouer war I-Tele -, nebeud-tre a Vuslimiz, met gant ar skinwel e voe aterset strolladoù bihan a Vuslimiz hag a Vorianed evit diskouez d'an dud e kendaont, int ivez, ar mesbukadoù a-enep *Charlie Hebdo*, pezh a oa pell da vezañ ar wirionez, rak pezh a feuke anezho ar muiañ a oa a-dra-sur an urzh bet roet da ziskelañ gant ar skritelloù *“Je suis Charlie”*, pa zegoune dezho an anv-se *“Charlie”*, anv ar gelaouenn he doa embannet ludresadennoù a gunujenne ar *“profed”* Mohamed evito. E meur a skol e bannlevioù ma vev ar brasañ eus an enbroidi ez eus bet un toullad skolidi o nac'h doujañ d'ar vunutenn sioulder en enor an dud drouklazhet. Er bannlevioù-se eo ivez ma vez selaouet e-leizh gant ar re yaouank ar strolladoù sonerezh Rap muslimat, gant o galvadennoù da vont da lazhañ ar gerreizhourion c'hall, hep na vefent nec'het gant ar justiz.

Bez' e oa sañset ar vanifestadeg-se bezañ evit difenn al *“frankiz eztaoliñ”*, ha niverus e voe an dud o tiskleriañ na fellas ket dezho *“bezañ Charlie”*, e anv ar frankiz-se. Kendaoniñ a raent al lazhadeg, kendrueziñ a raent ouzh poanioù familhoù ar re bet lazhet, hogen ne felle ket dezho bezañ kenlodek gant ur gelaouenn he doa hadet an avel gant he ludresadennoù kunujennus e keñver an Islam (met ivez e-keñver ar Gatoliked hag en un doare euzhusoc'h c'hoazh d'am soñj) hag a eoste bremañ korventenn kounnar ar re bet gloazet gant ar flemmdresadennoù-se. Hogen ne c'helle ket bezañ ar frankiz-se gant tud ar reizhiad, gwelet ha klevet hon eus Nathalie St Circq, penn ar servij politikel er chadenn skinwel France 2, o tiskleriañ dic'hoarzh e oa ret diguzhat an holl re a nac'he dougen ar skritell *“Je suis Charlie”*, hag o rediañ da heuliañ un doare staj addiorren evit sankañ en o fenn an aviel republikan nevez-se, ha chom hep aotren dezho adc'hounit ar

gumuniezh vroadel nemet p'o devo komprenet abegoù reizh kement-se ; surrealour e oa ar rannarvest, kredet hor bize bezañ en ur c'hamp addiorren en Unvaniezh Soviedel gozh pe er Vietnam komunour, war-lec'h tec'hadeg an Amerikaned.

Heverk, hogen un tammig amzere, ha laosk zoken, eo bet ar ger-stur roet gant ar strolladoù politikel gall da heul al lazhadeg, gant Marine Le Pen zoken : dreist-holl "droukvesk ebet"¹², evit chom hep gourtamall¹³ hor c'henvroidi vuslimat, evel ma vez lavaret ganto. Koulskoude e ranke soñjal an darn vrasañ eus ar C'hallaoued : "Neoazh e oa Muslimiz ar vuntrerion-se ha graet o deus o muntr e anv an Islam", pezh a zo kadarnaet gant rener ne ouzon mui petore kelaouenn arabek en doa lavaret : "An holl Vuslimiz n'int ket islamourion, hogen Muslimiz eo an holl islamourion". Miret strizh eo bet d'an urzhioù-se gant ar strolladoù gall¹⁴ hogen en un doare diac'hinek a-walc'h n'o deus ket ken termet-se gant o lugan "Je suis Charlie" a c'helle feukañ kalz a Vuslimiz, evit chom hep lavarout an holl, na gant adkemer embannidigezh ar gelaouenn "Charlie Hebdo" gant ludresadennoù adarre eus ar "profed" Mohamed o terc'hel en e zaouarn ur skritell "Je suis Charlie". Graet eo bet an dra-se marteze evit haeriñ : "N'hon eus ket aon rak ar sponterezh islamek", hogen feuket bras c'hoazh eo bet ar Vuslimiz, ha manifestadegoù ez eus bet dre ar bed muslimat : er Pakistan, en Afghanistan, en Egipt, en Iran, e Tchetchenia, en Nijer... Hag er vro diwezhañ-mañ ez eo troet da fall ar manifestadegoù, e Niamey, kêrbenn ar vro : un dek bennak a ilizoù a zo bet tangwallet (45 lec'h-gouloc'h¹⁵ er vro a-bezh hervez an Iliz en Nijer) ha dek den d'an nebeutañ a zo bet lazhet, hag a-dra-sur Kristenion, ha pegement er broioù islamek all ? Ne oa nemet kolloù kenstur o deus soñjet tud 'zo marteze, keñveriet gant an dek den drouklazhet eus *Charlie Hebdo*. Finoc'h eo bet tud ar gelaouenn danat *Jyllands-Posten*, he doa embannet ar flemmdresadennoù kentañ

¹² Droukvesk ebet : *pas d'amalgame*.

¹³ Gourtamall : *stigmatiser*.

¹⁴ Zoken ar « Front National », met Aymeric Chauprade, kannad european an FN en deus embannet ur video, a gaver war ar genroued, e-lec'h e tispleg sklaer atebegzh an enbroerezh muslimat er pezh a zo c'hoarvezet. Marine Le Pen en deus difennet eilañ ar video-se, hogen n'eo ket bet sentet outi gant he nizez, Marion Marechal-Le Pen, reuz a vo en FN.

¹⁵ Gouloc'h : *culte*.

eus Mohamed, e miz Gwengolo 2005 ; en em viret int ar wech-mañ da embann petra bennak a vefe.

Ouzhpenn d'ar ger-stur "droukvesk ebet", e hañval bezañ bet ur ger-stur all : arabat komz eus an enbroerezh, un enbroerezh muslimat evel-just, hag a zo bet dibaouez abaoe pergont vloaz. Koulskoude ne c'hell ket ar bolitikerion mirout ouzh ar C'hwec'hkogniz da soñjal : mar ne vije ket bet lezet ganto - ar bolitikerion - da zont er vro c'hwec'h pe seizh milion a Vuslimiz, mar n'eo ket muioc'h, ne vije ket bet c'hoarvezet an dra-se. Komzet o deus ar bolitikerion eus ar ret ma oa da ober an "unvaniezh vroadel" dirak begozh¹⁶ ar sponterezh, hogen evit kuzhat o c'hiriegezh er saviad a-vremañ e oa an dra-se. En ur vont da blantañ ar brezel e Libya en deus ar Prezidant gall Sarkozy, eilet gant e ene daonet, BHL, distabilaet a-grenn ar rannved-mañ. Ur wech drouklazhet Kadafi, ha distrujet e arme, ez eo bet strewet d'ar seizh avel e arsanailh bras a armoù a oa eus an arnevesañ. Atoret¹⁷ int bet gant meur a strollad a oa darsavet¹⁸ a-enep Kadafi, met dreist-holl gant djihadourion Al-Qaïda er Maghreb islamek, hag a zo aet d'o zro da blantañ ar brezel er Mali hag e Republik Kreizafrika. Ar Prezidant gall nevez, F. Hollande, en deus kredet e oa e zever kas an arme c'hall en div vro-se evit klask mougañ an tangwall, met e-keit-se e kase armoù d'an djihadourion a stourme e Siria a-enep Bachar al-Assad. Pelec'h e oa ar poell e kement-mañ ? P'en deus gwelet al lazhadegoù euzhus a rae an djihadourion-se o doa krouet ur Stad Islamek e Siria hag en Irak, a-enep d'ar Gristenion ha nann-Muslimiz all, pe Muslimiz ha n'int ket sunnat, en deus kemmet e fuzuilh war e skoaz. Roet en deus urzh d'an arme c'hall mont da vombezennañ djihadourion ar Stad Islamek. Evit kalz Muslimiz e tle an dra-se bezañ gwelet evel un trubarderezh.

Lezel dont en e vro milionoù a Vuslimiz, aotren da imamed eizhavour¹⁹ dont da brezeg er moskeennoù, ha goude-se mont da blantañ ar brezel en o bro orin, ez eo un tammig diskiant pa ne zalc'her ket kont ez int eus ur sevenadur disheñvel-krenn diouzh ar sevenadur europat, merket-bras gant ar Gristeniezh, peogwir war-

¹⁶ Begozh : *menace*.

¹⁷ Atoriñ : *recupérer*.

¹⁸ Darsavet : *rebellé, révolté*.

¹⁹ Eizhavour : *extrémiste*.

lerc'h dizarbennadur ar C'hrist gant Jeruzalem ha pobl Israel ez eo deuet Roma da vezañ kreiz ar Gristenelezh. A-raok asantiñ d'an enbroerezh muslimat divent-se o dije ranket ar begennoù²⁰ europat, hag ar begennoù gall da gentañ-penn, lenn ha studiañ ar C'horan. N'eus ket ezhomm gouzout ar yezh arabek evit kompren mat pezh a zo skrivet er C'horan, troidigezhioù mat ez eus en un toullad yezhoù europat, hogen ivez e kaver aes a-walc'h un toullad levrioù skrivet war an Islam. Hep bezañ rediet da lenn, da skouer, daou levr furchet pizh tezenn Edouard-Marie Gallez war an Islam, ez eus ar re skrivet gant an Tad Antoine Moussali, ul Libanad, an Tad Samir Khalil Samir, un Egiptian kopt, Alfred-Louis de Prémare gant e "*Sekred bras an Islam*", M. Alkader gant e "*Dremm wirion an Islam*", Leila Qadr, bet muslimadez ha kanttroet d'ar gatologiezh da c'houde, he deus skrivet "*Teir dremm ar C'horan*"; bez' e c'heller lenn c'hoazh al levrioù skrivet gant an Italianez Oriana Fallacci, hag e viot titouret mat goude-se. Kregiñ a reot ivez da soñjal ne vo an enbroerezh muslimat-se, tamm ebet ur "chañs evit Bro-C'hall", daoust d'ar pezh a c'hourbanne levr brudet Bernard Stasi, embannet e 1984.

Hogen, hor begennoù europat pe norzhamerikat n'o deus lennet hini ebet eus al levrioù-se; en em vozekaet²¹ int eus komzoù pilpous ar Vuslimiz o-unan, garmet diouzh gwalc'h, betek e-barzh meur a film-skinwel: "*ur relijion a garantez, a beoc'h hag a zamantegezh eo an Islam*". Setu perak hon eus klevet ar Prezidant gall, F. Hollande, oc'h haeriñ n'o doa an drouklazhadegoù sevenet en anv an Islam etre ar 7 hag an 9 a viz Genver e Pariz, "*netra da welout gant ar relijion vuslimat*". Lavaret en deus ivez, e oa diouzh ar pep retañ: "*stourm a-enep an islamgasaouriezh*²²". Biskoazh kement-all, bez' e kredfen bezañ en un ti 'vit ar re sod! Koulskoude, e lavar an Tad Samir Khalil Samir: "*Mar bez haeret gant ur Muslimad n'en deus ar feulster netra da welout gant an Islam, ez eo an den-se unan dizesk a-grenn pe ur gaouiad*" hag e lavar ouzhpenn: "*Bez' e oar ar Vuslimiz, ne anavez ket an nann-Vuslimiz ar C'horan, bez' e lavaront enta pezh o deus c'hoant lavarout, rak gouzout a reont ne vo den ebet evit mont da wiriekaat*". Eo! Tud 'zo a zo aet da welout, ha skrivet o deus levrioù evit displegañ ar wirionez,

²⁰ Ar begennoù: *les élites*.

²¹ Bozekaet: *contenter*.

²² Islamgasaouriezh: *islamophobie*.

hogen tavet e vez diwar o fenn gant ar meziennoù, a zo kenwallerion ar reizhiad. Tud 'zo a lavar, gant reizh abeg, arabat meskañ ar Vuslimiz didaer²³, broelet, *light, low cost*, gant an djihadourion: emañ marteze ar gwir ganto, met lod eus gourc'hemennoù ar C'horan a zo doujet gant an holl Vuslimiz - taer pe didaer e vefent - evel ar pec'hed a ziskanttro²⁴, ur muslimad ne c'hell ket dilezel e relijion ha kemer unan all, dreist-holl ar Gristeniezh, kendaonet eo d'ar marv, merket eo meur a wech an dra-se er C'horan: "*Mar bez dianzavet ganto o feiz (an islam) pakit anezho ha lazhit anezho, ne vern pelec'h e kavot anezho*" (S. 4, 89); "*Ar re a zinac'h o feiz (muslimat) a zo lorc'heion: milliget ez int! Hemolc'hit anezho hag e-lec'h en em gavont, e vint paket ha lazhet didruez, rak hep distro eo lezenn Allah*" (S. 33, 60-32).

Ar skrivagner aljerian, Boualem Sansal, skrivet gantañ "*Gouverner au nom d'Allah*" (Gallimard) a lavar, aterset gant Valeurs Actuelles (niv. 4077): "*Ar Vuslimiz ne reont ket an diforc'h-se (taer-didaer). An Islam a zo an Islam. Evito ez eus ar Vuslimiz vat hag ar Vuslimiz fall, ar barnverk*²⁵ a zo miridigezh strizh ar reolennoù". Hag ar reolennoù-se e-keñver ar Gristenion n'int ket gwall frealzus: "*Ar Gristenion o deus lavaret: "Mab Doue eo ar C'hrist", ra vint peurzistrujet gant Allah!*" (S. 9, 30); "*Lazhit tud al levr (ar Gristenion), rak ez int difeizidi ha ne gredont ket en Allah*" (S. 9, 29); "*Tud al levr (ar Gristenion) hag a zo diskredus, en ifern! Evit chom ennañ evit ar beurbadelezh. Bez' ez int gwashañ boudoù ar grouadelezh*" (S. 98, 6); "*Dic'houzougit an nann-Vuslimiz e-lec'h e kavot anezho, pakit anezho, lakait ar seziz warno ha stignit antelloù dezho*" (S. 9, 5). Leun eo ar C'horan gant ar galvadegoù-se d'ar stourm a-enep an difeizidi, da lavarout eo, an djihad, ha goude-se ne gredit ket e vije bet mat, d'hor begennoù europat, en em ditouriñ war levr "santel" ar Vuslimiz a-raok o lezel hon aloubiñ a vilionoù. Evel-just ez eus er C'horan souratennoù difeulz, pa oa Mohamed o prezeg er Mekka, en derou, en ur saviad a wander; ar souratennoù-se eo a vez arveret gant ar Vuslimiz evit hon touellañ hervez pennaenn vrudet an *takiya*.

Dargouezh hepken pe raskiant an aozour, d'an hevelep mare ma tarzhe ar mesbukadoù e Pariz e

²³ Didaer: *modéré*.

²⁴ diskanttro: *apostasie*.

²⁵ Barnverk: *critère*.

teue er-maez romant Michel Houellebecq : “*Soumission*”, a zo troidigezh ar ger “*Islam*” e galleg. Displijet e voe ar meziennoù gant al levr-se, ha d’am soñj un toullad mat a bolitikerion en em welas daoust dezho dindan tudennoù ar romant. Kontañ a ra ar romant penaos en em gavo Bro-C’hall e 2022 gant ur prezidant muslimat. Evit stankañ an hent da vMarine Le Pen, degouezhet kentañ e troiad kentañ an dilennadegoù prezidantel Bro-C’hall, en em glev ar strollad sokialour gant bleiner ur strollad islamek “didaer” evit e souten, hag ez a ar maout gant hemañ diwezhañ. Skrivañ a ra Camille Pascal en e gronikenn eus *Valeurs Actuelles* niv. 4078 ne zesk netra deomp levr Houellebecq. Emañ ar gwir gantañ evit an dud a oar gwelout an traoù evel m’emaint : bez’ e ouzont e c’hell c’hoarvezout an dra-se, mar ne vez ket lakaet un harz d’an enbroerezh muslimat o vont kreñv-ouzh-kreñv. Hogen evit an dud o deus c’hoazh an daoulagad pikous e c’hellfe marteze al levr-se o dibikouzañ mar ouezont ober an dostidigezh etre ar mesbukadoù ha pezh a gont Houellebecq, hag ivez pezh a gont Eric Zemmour en e levr dezhañ : “*Le suicide français*”, ha meur a levr all nevez embannet diwar-benn ar gudenn loskus-mañ, gant tud o deus distaolet diktaturiezh ar *politically correct*.

Aes eo da gompren an dañjer a vegozh Bro-C’hall hag Europa a-bezh siwazh : ur erlec’hiadur eus ar boblañs. Ur gudenn jedoniezh an hini eo, a c’hellfe aes a-walc’h bezañ diluziet gant ur bugel daouzek vloaz.

Diouzh un tu ez eus war-dro 220.000 sioc’hanadur bep bloaz er C’hwec’hkogn (hag heñvel eo er broioù europat all), hag e-keit-se e teu-tre war-dro 250.000 enbroad nann-europat bep bloaz. Diouzh un tu all ez eo izel an niver keitat a vugale dre vaouez a orin europat (1,6) re izel evit ma vefe adnevezet ar rummadoù, pa vez uhel an niver keitat dre vaouez enbroad, afrikan pergen (3,5 pe 4). Ne c’hellan ket krediñ ne vez ket meizet an dra-se gant ar begennoù, neuze ez int kenwall, ha mard int kenwall ez eo dre ma-z int a-du gant ar vedelouriezh, hironadur bras ar poblañsoù ha steuzidigezh ar broadoù...

Evit klozañ e tistroan d’an tsunami “*Je suis Charlie*” evit va atersiñ. Ha mar bije bet taget kentoc’h ur gelaouenn sizhuniek a-zehou evel *Valeurs Actuelles* he deus gouestlet d’an nebeutañ un daouzek bennak a niverennoù da gudenn an enbroerezh hag an djihadouriezh, gant bewech ur golo skogus, na guzhe ket an danvez ma oa keal ennañ, daoust hag heñvel vije bet ersav ar gouarnamant sokialour. Un tammig douetañs em eus, rak daoust ma oa taget ha flemmet ar gouarnamant sokialour gant “*Charlie Hebdo*” e chome memestra an daou eus an hevelep bourzh : ur strad kozh c’hwegonteizhat, a-du gant an enbroerezh, un dismeg eus ar bobl a vouezh fall hag a chom stag ouzh he hengounioù, relijiel pe get... pezh n’eo ket an degouezh gant ar sizhunieg all.

Donwal Gwenvenez

Kêrvrezhon : un arnod da sevel ur gêriadenn vrezhonek 2/2

Lenomp bremañ pezh a skriv an daou diegezh-se a hiziv, a sant, dre ma-z eus skiant vat ganto, e rank ur yezh kaout “un tiriad”, ul lec’h e-lec’h emañ he zachenn dezhi, ul lec’h ma-z eo estren ar galleg, kevezerez varvus hor yezh :

“*Kêriadennoù ekologek*”. Setu seurt raktresoù a weler muioc’h-mui. Ha kêriadennoù brezhonek ?

Piv e Breizh a c’hell mont e darempred gant e amezeien hep bout rediet d’ober gant ar galleg ? Tiegezhioù brezhonek a zo anezho – ral int avat. Lod o dez chañs da gomz pe da glevout brezhoneg gant un amezeg bennak, gant unan eus o familh pe ur c’hamalad ... Ral eo ivez.

Peogwir emañ strewet ar vrezhonegerien, ha peogwir emañ start kavout e Breizh un endro ma raer gant ar brezhoneg hepken (evel ba KEAV da

skouer) eh eus kellidet ur raktres ganeomp : sevel ur gêriadennig, gant brezhonegerien hepken.

Ganeomp ? Ha piv omp 'ta ? Daou diegezh brezhonegerien (evit poent) : ur c’houblad (25 bloaz ha 34 bloaz) hag unan arall (26 bloaz ha 34 bloaz), ur c’hrouadur 1,5 bloaz dezhañ hag a vo breur bras e miz An Azvent). Daou goublad neuze ha n'o deus ket aon rak kozh-barnioù an dud. Ne reomp ket kas ouzh gerioù-toull evel «serr», «faskour», «integrou». Gerioù diboell ha direizh pa ne fell deomp-ni nemet bevañ eürus en hor bro-ni, gant hor yezh-ni ha gant hor re-ni war douar hon hendadoù, ha tra ken. Ur ger bravoc’h a ra tomm d’hor c’halonoù : « brogarour ».

Setu diwanet hor raktres bloazioù 'zo bremañ. Edan-berr e krogimp da vat e-barzh. Klasket ha kavet hor boa ur yoc’h tud dedennet.

Siwazh ne oant ket evit mont betek penn : lod anezho ne oa ket arru c'hoazh o c'hourz dezho, lod all avat, ne oant ket evit lakaat ar raktres-mañ da bennraktres-buhez.

Emskiant omp ez eus a bep seurt skoilhòù da zerc'hel gant ar brezhoneg hepken ba'r gêr, daoust d'ar gerent bout brezhonegerien int o-daou ! Pet familh o deus dilezet ar brezhoneg evit mont davet ar galleg ? Unan eus ar c'houblad galleg gantañ hepken, ur vagourez a gas galleg d'ar vugale, gwask ha rakvarnioù ar familh hag an endro, amezeien gallegerien-razh anezho, bugale brizhvrezhoneg ganto ... kement skoilh maget gant an endro a ziskar ar spi hag ar youl.

E berr gomzoù, setu ger-stur ar gêriadennig : brezhoneg e pep lec'h, ha brezhoneg hepken !

Spiañ a reomp neuze ez eus tiegezhioù a vefe entanet da zont d'hon heul er raktres, goude bout lennet hor pennad.

O klask emaoamp war-lerc'h familhoù gwriennet ha stabil-mat (koubladoù yaouank pe ket, koubladoù gant bugale desavet e brezhoneg ...) ha tud kozh a fell dezho treuzkas o yezh d'ar rummadoù nevez ha bevañ e-mesk brezhonegerien. Ne soñj ket deomp avat e c'hell un den yaouank e-unan derc'hel d'e c'her tra ma n'en do ket kavet e hanterenn ha krouet e raktres ganti.

Hiriv an deiz emaoamp o chom e Bro-Gwened hag e Bro Dreger. Soñjal a ra deomp e vefe ret lakaat hor bugale diwezhatoc'h en ur skol m'emañ ar brezhoneg ar yezh nemeti (dre soubidigezh evit mat : er c'hlasoù hag er porzh-skol). Evit poent ha diwar a ouïomp n'eus ket nemet unan bennak mod-se (siwazh !) ha lod-kaer anezhe a vehe e Bro-Gwened. Ma anavezit lod all, lârit deomp ! Prest e vefemp da soñjal krouiñ ur skol er gêr mod-all.

Desket hon eus brezhoneg a-vihan pe war an diwezhat, livioù brezhoneg disheñvel 'zo ganeomp ha klask a reomp pinvidikaat hor live a zeiz da zeiz.

Soñjal a ra deomp e c'hellfemp bout amezeien hepken, pe kavout raktresoù hag un emglev kenetrezomp. N'eus netra seizet penn-da-benn c'hoazh, hervez an dud e vo gwelet ...

Selaouit 'ta tud yaouank hag ar re gozh ivez

Piv 'vefe trawalc'h a lorc'h ennañ, en e vro, en e yezh, en e familh evit digêriañ, - pe hon degemer ! - evit krouiñ a-gevret, un endro, ur gêriadennig vrezhonek ?

Salv ma kredo tud all mont ganto pe ober evelto. N'eo ket eta evit "kavout un toull" hogen evit mat ar yezh, rak seurt kêriadenn, ma teu da wir a vo tonket da sachañ energiezhioù da gas erv ar brezhoneg war raok.

Kostez Kergo Plougernev ez eus ivez familhoù brezhonek o chom tostik-tost an eil eus ar re all... Ozhac'h unan anezho a zo aet da vaer zoken. Forzh penaos ez eo ret-mat bezañ spiswel : n'eus tu ebet da sevel e diegezh e brezhoneg hep kaout darempredoù gant tiegezhioù brezhonek all, ha frammoù d'o sikour evel skolioù hollvrezhonek da skouer. Ha c'hoazh : diaes-tre e vo, daoust ma seblant bezañ aesoc'h bremañ eget daou-ugent vloaz 'zo da skouer.

En ur bed hiniennelour-tre emaoamp : dre se n'hon eus ket mui ezhomm bras, er pleustr, eus hon amezeion dostañ. Ar genrouedad 'zo ivez (facebook a c'heller ober gantañ e brezhoneg ivez, nevez 'zo...), ar pellgomz, ar c'harr-tan... En ur vroig evel hini Landerne-Daoulaz e konter bremañ ouzhpenn 250 bugel er skolioù divyezhek, da lavarout eo miliadoù a dud a zo tremenet dre ar skolioù-se a-benn bremañ. Gant "Etrearfaouhalanderne" a gaver atav war ar genrouedad em boa savet ur renabl resis eus kemet tra a denn d'ar yezh en tolead-se hag abaoe ez eus e Landerne un "Ti ar Vro" a zo e bal bodañ ar vrezhonegerion emskiantek. Siwazh ned a ket mat en-dro evit c'hoazh : re nebeut a labourerion. Tu 'zo da soñjal evelkent e vo efedusoc'h en amzer da zont rouedad ar c'hevredigezhioù seurt-se evit krouiñ ur vuhez lec'hel e brezhoneg.

E lec'hioù 'zo a Vreizh e c'hellfe dont da wir kumuniezhioù hollvrezhonek liammet gant ar rouedad-se : tost d'ar c'hêrioù da gentañ rak kavout labour a ranker ha niverusoc'h e vo atav ar vrezhonegerion e kêr hiviziken eget forzh pelec'h war ar maez (dilezet a-grenn eo ar yezh gant ar gouerion a-benn bremañ) hag e lec'hioù all marteze e lec'h ez eo diazezet un tammig an Emsav : da skouer kantonioù Lanniliz, Plougerne, Landerne, Lannuon, Gwengamp, Pondi...

Skoilhòù hag enkadennoù a vo war an hent : kudennoù arc'hant, labour, yec'hed, tiegezhel, evel gant nep piv bennak. Ouzh an holl embregadennoù-se, pe dost, em eus arvestet pe gemeret perzh, da reiñ d'hor yezh ur gevredigezh dezhi hec'h-unan. Dont a ra din ul lavarenn gant Youenn Olier : «Mont a reomp eus un enkadenn d'eben, met war-raok ez eomp memestra.». Er bloavezhioù da zont e tiglono en Emsav raktresoù all a gevredigezh vrezhon : «Kêrvrezhon» a zo unan anezho a dalvez ar boan bezañ brudet ha skoazellet. Brezhoneg yezh kefridiel, Ya ! Hogen er gêr da gentañ, gant an tammig frankiz a chom gant pep hini ac'hanomp, ha ma c'heller ober e doare ma vezo ivez brezhoneg gant an amezeion : gwel a se ! Bezañ daou diegezh a zek-kement an nerzh, ha neuze, ma c'heller bezañ tri, pevar... seul welloc'h a se !

Tepod Gwilhmod

Pelec'h emañ bugale Diwan

An deiz all edon e iliz an Draeneg evit abadenn ziwezhañ “Al Laz-kanañ”, dibenn an dro-gaer a zek vloaz bennak, ha div bladenn, gant ur stroll a dud bet an darn vras anezho e Diwan, ha zoken e Lise Diwan. Ur stroll a spered kristen ivez, dre ma oa bet herberc’hiet gant “Minihi Levenez” ha lusket evit un darn gant Kaou Samson, a zo bet beleget bloaz hanter ‘zo. Ur stroll kaer e oa a chome a-sav en devezh-hont : o gwelout a raed laouen-holl o vezañ asamblez hag o kanañ.

An darn vras anezho a zo krog en o red-micher a-benn bremañ avat, ha siwazh eo deuet re ziaes, emezont, kenderc’hel gant al laz-kanañ. Evel-se emañ ar vuhez, a lavaront. Arabat bezañ trist : treiñ a ra an amzer, setu holl. A zo gwir moarvat. Hogen a-raok pell ne vo mui kanet meuleudi da Zoue en hor yezh en doare-se, a oa dezho, leun a startijenn, a enta, a yaouankiz, kanaouennoù dic’hiz, iskis a-wechoù, evel o C’hyrie war un ton a Vadagaskar...

Met traoù a dreuz a gavan en afer-se : da gentañ e c’heller en em c’houlenn perak ne oa ket bet degemeret ganto tud yaouankoc’h egeto da genderc’hel gant al laz-kanañ war o lerc’h, evel ma ra an holl lazou-kanañ all. Met dreist-holl en em c’houlennan ivez perak ne zimez ket izili al laz-kanañ-se (ha dre-vras ar vrezhonegerion a oad ganto), ne savont ket tiegezh, ha ma c’hoarvez ganto ober, ez eo peurliesañ e galleg, eveljust, beuzet ma-z omp en ur bed gallek.

Magañ a raen ur spi, kuzhet em askre, mezhus un tamm, dre ma n’eo ket brav diskouez ur « spered strizh », e timezfe ar bras anezho kenetrezo, ha ma savfent tiegezhioù brezhonek, ha kristen zoken, war ar marc’had.

Rak ret eo hen diskleriañ fraezh, begenn bugale ar skolioù Diwan ez int ha poent bras eo dezho sevel tiegezhioù kenetrezo ma fell dezho kaout bugale, ha bugale brezhonegerion. Piv a raio ma ne reont ket int o-unan o deus resevet kement a-berzh o zud ha Diwan ?

Met ne reont ket. Bevañ a reont o yaouankiz.

Ha c’hoazh. Ne vezont ket gwelet er frammoù zo evito da gas stourm ar yezh war-raok, en Ai’ta ! da skouer. Un druez eo. Na pegen efedusoc’h e vefe ar stourmoù m’o defe c’hoant bugale Diwan (hag ar rouedadoù all) kemer perzh er stourmoù !

Ha perak ne reont ket ? C’hoant o deus bevañ o yaouankiz, se am eus meneget dija. Hogen un abeg donoc’h a zo, ha n’eo ket brav anzav : en abeg da Ziwan e-unan. Kiriek eo Diwan, d’am soñj, da chom hep treuzkas d’ar vugale a vez fiziet ennañ ur gwir garantez-vro, hag ar c’hoant da zerc’hel start d’ar yezh e pep degouezh. E pet skol Diwan e klever brezhoneg war borzh ar skol ? E nebeut-nebeut anezho. E pet anezho e vez kelennet a-zoare istor Breizh evel hon istor broadel ? E pet anezho e tisleger roll an Emsav en istor-se, peseurt kiriegezh a zo da sammañ evit ma vevo ha ma skedo el ledenez-mañ ur gumuniezh vrezhon a roio un dazont d’ar vro, estreget hini un ti-retred, ur mirva touristel pell diouzh Mittel-Europa pinvidik ? Peseurt patrom-kevredigezh a garfemp sevel evit Breizh ? En ur ger, reiñ c’hoant d’ar yaouankizoù da gregiñ e-barzh ar stourmoù d’o zro : ar stourm evit an endro, a-enep ur gorvoerezh arloupet, a-enep ur gevredigezh-veveziñ a lez kement a dud a gostez, na pa ve ken gant ur feur dilabour dreistgoñvor, met ivez evit ur gevredigezh deneloc’h, diazezet war dalvoudoù milvedel evel... an tiegezh !

Hag aze en em gavomp gant dislavar pennañ emsav Diwan : diazezet eo war an tiegezhioù a bourchas bugale d’e skol, met lusket eo gant rummadoù tud levezonet don gant brizdispac’h eizh ha tri-ugent, a-du pergen gant “ar frankiz revel”, “gwirioù ar merc’hed” (evel an diforc’hañ bugale), an torr-dimezi ha kalz a boentoù all a ya holl a-enep kellig diazez ar gevredigezh : an tiegezh.

Ret eo eta lavarout sklaer war bep ton ha pep son ne raio netra a vad an emsav hep tiegezhioù kreñv, a ren enno da vihanañ ar garantez hag ar genskoazell, ha menegiñ a ran ouzhpenn – ra’m digarezor !- ar relijion hag ar garantez vro, a zo sikourioù kreñv ha diziouerus d’am soñj evit en em reiñ evit gwir d’ur stourm evel hini an Emsav.

Met aesoc’h eo chom hep dimeziñ forzh penaos, a soñj lod, gant niver an torr-dimezioù a vez endro dezho, ha ne zimezer ket mui en deiz a hiziv, n’emañ ket mui ar c’hiz, emezeur, re zistabil eo bed al labour eo, diaes-mat eo ivez evit ar merc’hed ren ur red-vicher a zoare ha sevel bugale war-un-dro, hag all hag all... Gwelloc’h bevañ en e frankiz. Kalz eus merc’hed ar

strollad-se, pegen, Al Laz kanañ, padal, a dosta d'o zregont vloaz ha n'anavezan nemet div o dije bet bugale. Ya, met bevañ en e frankiz d'ober petra eus e vuhez ? N'eo ket bet desket dezho emañ an eurvad da vezañ kavet e avantur ar sevel-tiegezh. An evurusted a vez kavet dre en em reiñ d'e bried, d'e vugale, d'e vicher, d'e vro. Ar plijadurioù all a zo berrbad ha blaz an trenk ganto p'en em gav ar vaouez dic'houest da gaout bugale da skouer.

Un druez eo.

Lavaret e vez gant lorc'h ez eus 15000 bugel en tri rouedad brezhonek.

Lakaomp eta 1000 nevez bep bloaz o vont d'ar skol-vamm.

Hogen pet o deus desket brezhoneg da vat pe zeuont d'an oad gour ?

Ha pet diwar ar re se a ra eus ar brezhoneg o yezh dezho-o-unan ?

Ha pet n'int ket rediet da vont er-maez eus ar vro d'ober o studi ?

Ha pet diwar ar re-se na zistroont ket en abeg d'o micher pe dre ma kavont o fried er-maez eus ar vro ?

Ha pet a chom e Breizh hep ober nemeur a van ouzh o hêrezh ?

Rak gortoz a reomp anezho war dalbenn an Emsav ha n'o gwelomp ket.

Gwir eo n'eo ket fentus buhez an Emsav !... Padal, just a-walc'h, gant "Allah's kanañ" e oa fent ha birvilh, plijadur hag efedusted.

Soñjit 'ta ma teufe da stourm en Emsav mil den yaouank ouzhpenn bep bloaz ?

Pell 'zo hor befe adunanet Breizh, ar chadenn skinwel, ha birvilh en Emsav, ha pergen e Emglev An Tiegezhioù, rak sklaer eo ez eo er yaouankizoù-se en deus Doue fiziet amzer da zont hor Bro.

Piv a vo gouest da adaozañ Diwan ma c'hoario gwelloc'h e roll en Emsav, sed aze ur goulenn avat !

T. Gwilhmod

"Sklêrijenn ar bed" eo Jezuz

Jezuz a lavaraz dezhañ : "Kae d'en em walc'hiñ e lenn Siloam". Mont a reas enta, en em walc'hiñ, hag e tistroas o welout. (Pare an den bet ganet dall. Yann, 9, 7).

Istor an den bet ganet dall a skeudenn disklêriadenn an Aotrou Krist, o lavarout diwar e benn e-unan : "*Me eo Sklêrijenn ar bed. An hini a zeu d'am heul ne valeo ket en deñvalijenn.*"

Ar Mab a zo bet roet dimp gant an Tad evit bezañ sklêrijenn war hon hent. Aotrou ar Sklêrijenn eo-Eñv. Ar Sklêrijenn deuet da vezañ den. Setu perak e plij dezhañ ober gant ar ger "sklêrijenn". Deuet eo-Eñv evit ur skleriadur, evit ma c'hellfe an holl dud anavezout Doue, E zibab, E garout.

O kejañ gant Jezuz, an den-se a zo bet sklêrijennet e div zoare. Digoret eo bet e zaoulagad. Digoret eo bet e galon d'ar Mesiaz, rak daoulinañ a ra dirazañ evel dirak un Doue. Ha kement-se holl, a drugarez d'e izelded ha d'e c'hougled²⁶, d'e fiziañs.

Ar farizianed int-i, o soñjal dezho gwelout a

²⁶ Gougled : *fiziañs*.

chome dall, en abeg d'o brasoni ha d'o otusted, dirak ar Sklêrijenn Veur kinniget dezho gant an Aotrou Krist. An dall-eñv ne oar ket. Int a oar, amgredik. Krediñ a reont gwelout pep tra. Ne asantont ket bezañ kenteliet, kaout skol digant unan bennak. Mouchet, stanket eo o daoulagad gant al lorc'h.

"Ar Verb, a-skriv Sant Yann, a zo ar Sklêrijenn wirion. Met n'eo ket bet anavezet gant ar bed... Deuet eo ar Sklêrijenn er bed hag an dud o deus kavet gwelloc'h an deñvalijenn."(Yn 3) Setu ar marvantr²⁷. Un drama a hiziv-an-deiz. Ur saviad loskus a-vremañ.

Dallet eo an den gant idolennoù : re ar gouzout, re ar gallout, re ar c'haout. Lonket, klapet eo buhez an den-se gant bep seurt korvoderioù, labourioù, dihuedoù darempredoù, keleier.

An den arnevez, kelaouet a bep tu, fizius er c'halvezerezh hag en enraog, a zo otus, emlorc'hek. Na galloudus ez eo ar brasoni da zallañ !

Pa ouezer pep tra, paz eo leun pep tra, pa n'eus toull ebet, an Doue-Sklêrijenn ne c'hell ket en

²⁷ Marvantr : *drame, événement tragique*.

em silañ. En em ziskleriañ a ra pa-z eus un diouer.

Bez' e c'hell bezañ ivez un enklask birvidik eus ar wirionez ; dinac'h a zo avat eus pep sklêrijenn ha ne vije ket denel. An den a fell dezhañ en em harpañ hepken war gouleier e boell. Fellout a ra dezhañ en em sklêrijennañ gant e zoare, d'e vod. "Me a oar, a soñj-eñv, drezon-me ar pezh a zo mat evidon".

Bez' e c'heller neuze kaout daoulagad kloz ha klask abegoù da chom hep krediñ, dre zroukverzh²⁸. Dre aon dirak gouramlegadoù²⁹ karantez Jezuz. Evit chom hep kaout trubuilh. Evit chom hep kemmñ tra pe dra.

Setu perak e lavar Sant Yann : "Gwelloc'h o deus kavet an dud an teñvalijennoù eget ar gouloù. Dre hon dor digor pe prenet d'an Aotrou Krist eo e tiskenn ennomp pe ar sklêrijenn pe an deñvalijenn".

Emaomp enta dirak un dibab : pe mont d'ar sklêrijenn pe mont d'an deñvalijenn. Setu dibab ar feiz. Hag ar feiz a zo lezel "Sklêrijenn ar bed" d'hon aloubiñ. Gant ar C'hrist-Sklêrijenn ec'h ouzomp e pelec'h emaomp. Ec'h ouzomp da belec'h ez eomp. Ec'h ouzomp piv ez omp.

Merzhet hon eus ez eo kaset an dall-se gant Jezuz d'an em walc'hiñ d'ur feunteun. Anat eo! Bez' hon eus, amañ, un arouez eus ar Vadeziant. Gwir eo, dre hor Badeziant ez omp bet soubet, splujet er C'hrist-Sklêrijenn. Ar vadeziant eo sakramant ar feiz. Ar feiz hag a zigor daoulagad hon ene d'an Hini a zo Sklêrijenn, o tont-ni da vezañ lugernus, sklêrijennus.

²⁸ Droukverzh : *insuccès, échec*.

²⁹ Gouramlegadoù : *exigences, obligations*.

Evel-just, hervez an doare ma lakaomp hor Badeziant da dalvezout, a-hed hor buhez, evit hon liammañ gant ar C'hrist-Gouloù. Ar sakramant-se, o vezañ dialusk³⁰, nerzhed, a zlefe bezañ un tremen dizehan eus hon teñvalijennoù da sklerijennou estlammus Hini Bev Pask.

Dres, ar C'horaiz a zo ur mare kreñv evit termen evel-se hag ouzhpenn, ur marevezh laouen, rak bez' ez eus ur sklêrijenn greñv. "Dihun eta, a youc'h Sant Paol, en e Lizher d'an Efezidi (5/14), adsav a-douez ar re varv ha warnout ar C'hrist a baro."

Siwazh, e meur a hini ez eus dinac'h eus ar Sklêrijenn. Bez' ez eus bet anezhi. Met distaolet eo bet. Ar C'hrist Jezuz a lavar dimp ez eus aze "ar pec'hed a-enep ar Spered Santel, ur pec'hed, emezañ, ha n'eo ket pardonadus". Kaletaat an divskouarn, serriñ an daoulagad, setu ar pec'hed a-enep ar Sklêrijenn. An hini a brenn warnañ e-unan, diwar emyoul ouzh ar Sklêrijenn-se en em denn, en em skarzheñv e-unan eus ar vuhez peurbadel.

Ur c'hevrin eo. Kevrin Goulou an Aotrou Doue o sklêrijennañ pe o tallañ. Kevrin frankiz an den hag a gav gwel an noz eget gwel an deiz.

Daoust hag hor sklêrijenn eo Jezuz-Krist ? An Hini a sklêra hor buhez pemdeziek, tiegezhel, micherel, hon divizoù, hon dibaboù, hon degemeroù, hon dinac'hoù, hon enkadennoù, hor poanioù. Mard eo sturiet don hor c'halon gant ar Goulou-se, neuze ar re a zo tro-dro deomp a welo ivez ar Goulou, "a zeuio d'ar Goulou".

Youenn Troal

³⁰ Dialusk : *dynamique*.

Notennoù diwar an darvoudoù *gant Yann Maneguen*

Deiz-ha-bloaz lezenn Veil. Etre 1975 ha 2014 ez eus bet lazhet, gant bennozh al lezenn, ouzhpenn 4.000.000 a vabiged diantek e Frañs. Pedomp evito, pedomp evit o mammoù, pedomp evit o zadoù (a vez disoñjet alies), pedomp evit an dud a vev gant an dra-se war o c'houstiañs, pedomp evit ar re a lez ober al lazhadeg-mañ.

E 1999 e stourmas taer Christine Boutin ouzh ar PACS. E 2014 e c'houlenne e vefe kreñvaet ar PACS ! Evit gwir eo ret dilemel hag ar PACS, ha lezenn Taubira, ha lezenn Veil, ha lezennoù Léonetti : eveljust. Kontrol int d'al lezenn

naturel, met siwazh ne seblant chom nemet kristenion 'zo oc'h enebiñ.

Etre 1939 ha 1941 e oa bet lazhadeg war-dro 70.000 klañvidi ha nammidi gant an Nazied : dre ma oant "didalvoud". Gant klemmoù an eskob Van Galen e oa sañset al lazhadeg da chom a sav, hogen 30.000 a zo bet c'hoazh betek dibenn ar brezel. Ar c'hannad frank-mason Caillavet, marvet da 100 vloaz, a oa a-du gant ar gwir da lazhañ ar vabiged e-barzh kof o mammoù (a anver IVG) met ivez e-kerzh tri devezh kentañ o buhez, ur wech ganet,

ma vez kavet “didalvoud” o buhez. Evel an Nazied. Gant kentañ lezenn Léonetti ez eus tu da lezel unan da vervel diwar an naon hag ar sec’hed. Gant eil lezenn Léonetti e vo tu da lazhañ an dud war-eeun : evel an Nazied.

Poblañsouriezh o vont da fall : Euredoù en tiez-kêr e Frañs e 2012 : 246 000 ; 2013 : 231 000 ; digresk a 6 % en ur bloaz hepken ! E-keit-se e oa bet 125 000 torr-dimezioù (da lavarout ouzhpenn an hanter eus an dimezioù e tiez-kêr ; 45 000 a addimezioù a vez bep bloaz evelkent) ; ar feur-genel dre vil den a zo war-dro 12 ganedigezh dre vil den bep bloaz pa vefe ret kaout tro-dro da 20.

E-keit-se, bepred abaoe 2012 e ren ar gouarnamant ur politikerezh tre a-enep ar familhoù, pezh a ya ent-anat a-enep ar feur genel : digresk an arc’hoproù tiegezh ; digresk ar “feur tiegezhele” (ar c’h/*Quotient familial*) a zo aet eus 2336 euro da 1500 euro e 2014 ; kresk an tailhoù ; an dilabour o washaat ha distabiled ar postoù-labour (na aesaont ket da zimeziñ seder ha nebeutoc’h c’hoazh da gaout bugale).

Anat eo ivez ez eo fall-du evit ar poblañsouriezh ar politikerezh a-du gant displeberidigezh ar Briedelezh gant afer an euredoù en tiez-kêr digoret d’ar pared heñvel o rev. War an hevelep tu fall eo aet ar gouarnamant p’en deus divizet paeañ holl vizoù an diforc’hañ-bugale : 217 000 e 2012 ha 227 000 e 2013 (4,7 % a gresk en ur bloaz, da geñveriañ gant digresk an euredoù war ar memes mare, dregantadoù uhel-mat evit prantadoù berr !...).

Falloc’h eo stad yec’hed ar vugale savet gant pared heñvel o rev eget gant koubladoù gwaz ha maouez. Betek-hen ne gaved nemet studiadennoù graet gant ar gronnad LGBT, gant war-dro 39 bugel studiet (ha dibabet en a-raok !). Bremañ ez eus ur studiadenenn bizh war 512 bugel bet dibabet gant an US National Health Interview Survey, ha kaset da benn gant Paul Sullins : ar vugale savet gant pared heñvel o rev o devez kudennoù kalz aliesoc’h eget bugale savet en ur familh naturel war meur a boent : emzalc’hioù fall, anken, diaesterioù-daremprediñ, diaesterioù a siperezh spered...

Kresket eo hollad an oaledoù gant un den gour hepken eus 19 % e 1999 da 22 % e 2014, e keñver hollad an oaledoù e Frañs, ur c’hresk a 16 % eta e-korf 16 vloaz. Ne gred ket ar c’h/CAF lavarout perak : dreist-holl maouezed a

sav o-unan o bugale da heul diasterioù gant o gwaz.

Abaoe 2004 eo digresket an advaberezh etrebroadel a 67 %. E touez ar broioù a roe kalz a vugale da vezañ advabet e kaver Sina ha Rusia. Gant ar fed ma ne fell ket d’ar riezstadoù-se e c’hellfe o emzivadad bezañ advabet gant pared heñvel o rev eo digresket niver an emzivadad a orin estren a c’heller advabañ. Da heul kement-se e weler muioc’h mui a dud a chom divugel o c’houlenn ar PMA hag ar GPA e Frañs a-benn kaout bugale, koustet a gousto.

Aotren genel bugale dre zoareoù kalvezadel ne ya ket a-du gant gwir ar bugel da c’henel en un doare naturel ha da vezañ savet gant e wir vamm ha gwir dad, hervez ar c’hig.

Stadoù Unanet Amerika : 12 % eo dregantad ar re zu er vro-se. 52 % eo niver ar muntroù sevenet eno gant tud du. 93 % eus ar re zu a vez muntret a vez muntret gant tud du. Gant a fedoù-se e komprener gwelloc’h perak e vez evezhiet muioc’h ar re zu er vro-se gant ar polis : n’eo ket dre ouennelouriezh eta, evel ma klask ar meziennoù hag an emsavadegoù re zu a zo bet nevez ‘zo reiñ da grediñ. E Frañs n’eus ket ar gwir da sevel seurt stadegoù : “Kit pelloc’h, n’eus netra da welout !”.

Diwar-benn muntreion ar Charly-Hebdo, ez int eus “Metou ar Buttes-Chaumont”. Lenn a reer er gelaouenn “Le Point” eus ar 16 a viz Genver ez eus ur c’heneil dezho, Mohamed el-Ayouni, a oa bet e Siria ha kollet gantañ e lagad hag e vrec’h kleiz en emgannoù : emañ ar C’hedskor Gall o paouez dereiñ dezhañ un arc’hopr evit ar re nammet ! Ha petra soñjal diwar-benn lez-ober ar Justis hag ar bolised pa ouzer edo sañset Cherif Kouachi mont d’ar c’homiserdi bep sizhun, met a oa evit gwir oc’h embreger ar vicher sponter er Yemen gant Al-Qaïda ?

Da heul lazhadeg an 11 a viz Genver e burevioù Charlie-Hebdo ez eus bet manifestadegoù dre holl ar bed muzulmat : 800.000 a dud e Grozni da skouer, hag e Niamey (Niger) ne oa ket deuet paotred an tan da vougañ an tan a oa bet peget e holl ilizoù ar gêrbenn gant un engroez muzulmat iset a-enep d’ar Gristenion, ha pet den a zo bet lazhet ? Kement-se gant tud a lavar bezañ fideled o frofed Mahomed, hogen pa seller a dost, tud pell da vezañ muzulmaned deol. Petra ‘zo kaoz eus ar feulster-se ? Ar ouezoni a berzh tud n’o deus

komprenet netra er relijion : an holl relijionoù pe sevenadurioù a c'halv an dud d'an doujañs, d'ar vreudeuriez, d'ar genskoazell, netra nemet evit gellout bevañ kichen-ha-kichen. Mennozhiaed ar frankiz a zo bet distummet gant an Dispac'h Gall : kavout a ra da dud Charlie Hebdo ez eus ar gwir, e anv ar frankiz-ezteurel sakr unan-hadizirannus, da lavarout ar pezh a garer, betek drouk-komz diwar-benn relijion, betek feukiñ an dud ha n'int ket dizoue (an dizoueadegzh a zo eta, ent-anat, relijion ar stad vourc'hiz c'hall a vremañ, bet ganet gant an Dispac'h...) o tiskouez o doue soubet en ur banne staot (Piss-Krist e Avignon...), pe o lu-skeudenniñ Mahomed netra dre ma ouzer ez eo berzhet e skeudenniñ gant ar relijion vuzulmat. Netra da welout gant mennozhiaed ar frankiz hervez ar feiz kristen : ar frankiz a zo roet d'an dud gant Doue evito d'hec'h implijout da ober ar mad e pep degouezh. Bevennet eo ar frankiz wirion gant ul lezenn a gaver en holl relijioù, ur wirionezenn a c'hell tizhout forzh peseurt spered eeun : bevennet eo gant lezenn ar garantez. Ur gwir gasoni enep ar grederion eo ober goap a-zevri ouzh o c'hredennoù dre lu-dresadennoù. Ma vefe graet goap outo dre implij arguzennoù gwirion, sonn, displeget a-zoare dre ul levr da skouer, e c'hellfen lavarout ez on Charlie me ivez, met ober goap evit ur blijadur lu ha bugelek, ha diwar benn un danvez sirius ma-z eus unan, ar relijion, se a zo digiriek ha danjerus. Arabat feukiñ are re wan, eme sant Paol en unan eus e lizhiri. Gant o lorc'hentez divent, e sach ar C'hallaoued brizh-dispac'herion-c'hwegonteizhat-se gwalennoù spontus war ar Gristenion er broioù muzulmat.

Meur a skol er-maez kevrat a vez kavet e Breizh er mare-mañ : e Brest pa ne ve ken e oa bet savet skol I.V. Rumengol ha skolaj I.V. ar Mor (6vet-5vet). E Gwipavaz ez eus bet nevez digoret ur skol kentañ derez gant Dominikadezed. E Landerne ez eus anv gant laiked da sevel unan all. E kostez Plerin e oa bet savet "Skol Sant Mikael Arc'hael" gant un anv brezhonek mar plij, hogen o vont en-dro e galleg (skol-libr@hotmail.fr). Youenn Olier a lavare e dibenn e vuhez e vo dav dimp sevel hor skolioù digevrat, er-maez eus Diwan hag eus servijoù an eskoptioù.

"Dibab" a aoz mouezhiadegoù nann-kefridiel evit stagañ Bro-Naoned ouzh rannbarzh Breizh. E Sant-Viaud e oa bet kroget e miz Du ha d'ar sul 8 a vz c'hwevrer e oa bet div all :

Langouët (35) ha Soudan (44). Etre 15 % hag 20 % eus ar vouezherion o deus mouezhiet daoust ma ne oa ket mouezhiadegoù rediek e doare ebet. An disoc'hoù a zo tro-dro da 80 % a-du gant Naoned e Breizh.

E 2014, e eskobiezh Penn-ar-Bed, n'eus bet nemet 906 eured katolik ha 3827 badeziant, ha 7242 obidoù katolik. Setu amañ bremañ stadegoù kefridiel nevesañ an INSEE, a zo evit 2012 nemetken : 3022 eured en ti-kêr, 1475 torr-dimezi, 9277 ganedigezh ha 10145 tremenvan. Da lavarout eo ne chom nemet war-dro 30 % eus an dud oc'h eurediñ en Iliz, 40 % eus ar vugale a vez badezet, ha 70 % o devez obidoù kristen.

Chom a ra 128 beleg oberiant e Penn-ar-Bed, 126 war o leve, ha 115 a laiked gopret. E 1960 e oa 959 beleg oberiant, 100 hepken war o leve – moarvat dre ma ne bade ket ar vuhez ken pell ha bremañ (78,7 bloaz e 2013 evit ar wazed, ha 85 evit ar maouezed) -, ha 1127 misioner.

Leun-chouk e oa an iliz-veur d'ar sul 8 a viz C'hwevrer abardaez e Kemper evit oferenn-gimiadiñ an Ao. 'n eskob Le Vert, met ugent beleg nemetken a oa deuet. E brezegenn a c'heller lenn war lec'hienn "*Risposte catholique*". Diskleriañ a ra an eskob bezañ gouzañvet kalz o klask gouarn ha reiñ ul lañs nevez da eskopti Kemper ha Leon. Goude 50 vloaz a lez-ober, n'eo ket souezh.

Sant Kurillos ha Sant Metodos gant Paol Kalvez

D'ar 14 a viz c'hwevrer e vez gouel ar sent Kurillos ha Metodos, daou vreur ganet war-dro 825 e Bro-C'hres, beleget e Kêrgustentin ha kaset da avielañ ar Slaved e Moravia e-lec'h ma rejont berzh bras dre ma trojont ar Bibl hag al Liturgiezh e yezh ar vro, ar slavoneg (en ur ijinañ al lizherenneg kirillek, a vez c'hoazh arveret en holl voioù slav). Taget e voent gant kloer a damalle dezho displeberañ an testennoù sakr en ur silañ enno hadennoù disivoudel dre ober gant yezh ar bobl, met ar Pab Hadrian II o harpas hag o degemeras e Roma. " Kurillos ha Metodos o doa komprenet ne c'hell ur bobl soñjal bezañ resevet ez-leun an Diskuliadur anez bezañ eglevet ha lennet en he yezh ", a anzavo ar Pab Benead XVI e Degemeradenn hollek ar 17 a viz gouhere 2009. " Kurillos ha Metodos a zo skouer ar pezh a anver an enstuziadur a c'houlenn groñs e tle ar Pobloù moullañ en o sevenadur dezho o-unan Ar C'hemennadur Diskuliet hag embann gwirionez Ar Silvidigezh en o yezh. E kement-se e wel an Iliz e Kurilloz ha Metodos ur vammenn a awen hag a oberenn talvoudus atav.

Buhez hon Emglev :

Kelc'h-lizher HTS ar Pab Frañsez "Lumen Fidei", diwar-benn ar feiz kristen a zo ganimp dindan ar wask. Troet eo en ur brezhoneg klasel gant Paol Kalvez. Goulennit eta "Lumen Fidei" e brezhoneg, 87 pajennad (11x21) 10 euro franko. Setu amañ un arroud da gaout un tañva :

"A-dreuz ur chadennad diastal a destenioù eo e teu dremm Jezuz betek ennomp. Penaos e c'hell bezañ ? Penaos bezañ asur da dizhout ar "gwir Jezuz" goude kement a gantvedoù ? Mar bije an den ur boud digenvez, mar fellje dimp loc'hañ hepken eus ar "Me" hiniennel a fell dezhañ kavout ennañ e-unan diarvar e ouiziegezh, ur seurt diarvar ne c'hellje ket bezañ. Ne c'hellan ket gwelout drezon va-unan hepken ar pezh a zo c'hoarvezet en ur marevezh ken pell diouzhin. Met n'eo ket se evelato an doare nemetañ a zo e kerz an den evit anaout. E darempred e vev atav an den. Dont a ra e-unan eus tud all, liammet eo ouzh tud all, pinvidikaet e vez e vuhez dre gejañ gant ar re all. Evel-se ivez e tenn an anaoudegezh hon eus ac'hanomp hon-unan - an emskiant - d'un doare daremprederezh, ha liammet eo ouzh ar re all a oa en hon raok : da gentañ-penn hon tad hag hor mamm, hag o deus roet dimp ar vuhez hag hon anv. Ar yezh zoken - ar gerioù a gomprenomp drezi hor buhez hag hor gwirvoudelezh a zegouezh ganimp a-dreuz tud all, ha miret e vez e memor bev tud all. Ne c'hellomp en em anavezout hon-unan nemet en ur gemer perzh en ur memor ledanoc'h. Evel-se emañ kont gant ar feiz, a gas d'e barfeted an doare denel da gompren. Tremened ar feiz, an oberenn-se a garantez en deus Jezuz roet drezi d'ar bed ur vuhez nevez, a zegouezh ganimp dre vemor tud all, testoù, hag evel-se e vez miret bev en enboud nemetañ a vemor ez eo an Iliz. An Iliz a zo ur Vamm a zesk dimp komz yezh ar feiz."



**Kelc'h-lizher
Hon Tad Santel ar Pab
Frañsez
"Lumen Fidei"
(Sklerijenn ar Feiz kristen)**

IMBOURC'H

Bepred e talc'h **Beilherion Karaez** da veilhañ tost bep Gwener da 9 eur noz, e brezhoneg hag e galleg.

Enfredet e vez muioc'h-mui a vrezhonegerion d'ober gant ar vezh e tiez departamant Pen-ar-Bed. Setu amañ an tiez pennañ e lec'h ez eus tu, a-hervez, da gaout darempredoù e brezhoneg : Ekomirdi Plougerne (ret mirout plasoù en a-raok) ; Ekomirdi Menez Are (Sant Riwal ha Kerc'hoad Kommana) ; Mirdi ar Sivi e Plougastell ; Mirdi ar micherioù kozh en Argol (gant tud a youl vat ha ret eo goulenn) ; e Mirdi a Arzoù-kaer Kemper e vez gweladennoù e brezhoneg bep an amzer' ivez. Evit al lec'hioù all ez eus tu da c'houlenn testennoù evit gweladenniñ e brezhoneg : Mirdi ar bleizi ar C'hloastr-Plourin, e maner Kerazan Loktudi, kastelloù Trevarez ha Keryann, e Maner Kernod hag e abatioù Daoulaz hag

ar Releg.

Oferennoù da zont :

Sul 1añ a viz Meurzh da 6 eur abardaez, e Chapel Sant Laorañs (bali Limerick, e **Kemper**).

Sul 15 Meurzh Sant Tomaz **Landerne** 10e30 hag e iliz-veur **Kastell-Paol** 11 e

Sul 19 a viz Ebrel, e **Karaez** 10e 30 hag e **Sibiril** 10e 30

Hag ivez bep Sadorn (oferenn ar Sul) e **Trelevenez** : da 6 eur noz e vez e-pad ar goañv. **Nozveilh Fask** da 9 eur d'ar Sadorn 5 a viz Ebrel.

Bep Sadorn kentañ ar miz e chapel ar Rusked **Lannou** da 18 e 30

Bep eil Sul ar miz da 10e 30 er Vinic'hi **Landreger** Bep Sul diwezhañ ar miz e **Kewen** da 18e 30.

Kañv : Aet eo Hervé Bouche da anaon e miz c'hwevrer en Alre, d'an oad a 80 vloaz. Ul labourer didrouz e oa, war-dro kontoù meur a gevredigezh en Emsav. Koll a ra hon Emglev ul lenner feal. Doue d'e bardono !

Mererezh :

15 € eo ar skodenn emezelañ da EAT a ro ar gwir da resev *Kannadig Imbourc'h* (18 € er-maez ar C'hwec'hkogn). Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ). Ar chekenn a zo da gas war anv **EAT** pe **Imbourc'h** da : E.A.T., c/o Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN - Roll an niverennoù pe oberennoù n'int ket c'hoazh diviet a c'heller kaout o skrivañ pe war : <http://emglev.wordpress.com>

Skridaozerezh :

Ar pennadoù a zo da gas da : jean-mariemichel@neuf.fr , pe dre ar Post da rener Kannadig Imbourc'h : Yann MIKAEL, 12, Straed René Giraud, 44130 BLAEN. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus skrivet anezho. Moullet ez-prevez gant an embanner : **Emglev an Tiegezhioù** Kergreven 29800 Trelevenez. ISSN : 1144 357X